

O tostaat eus Landregeur e kavis eur plac'hik ;
Koant vel eun elik Doue, he hanno voa Metik
D'ar gouent e ze ive, d'oun d'ar studi,
He c'halonik oa mantret kemen ha va hini,

« Salud deoc'h plac'h yaouank, a lavariz dez-hi,
« Evel d'oun oc'h ankiniet o kuitad tud ho ti,
« Ho tornik flor em dornik lakët gant karantez,
« Hac sesimp eureussoc'h o wela assemblez.

Ar plac'hik a lavaras : « O cloarec Gwnole,
« Pedom Doue alies an eil evit eguile,
« Er joa koulz hag an anken dalc'hit sonj a Velik
E uz a vrema da vi ken e ho mestresik

« — O Metik va c'harantez, rozen kaër a Vreiz-lzel !
« War ho mignon Gwenole tolit brema eur zell,
« Eur zell digant ho lagat a raï eureusted
« Keit a ma lezo Doue ac'hanon war a bed »

Erru e kaër Landreguer, erru e penn hom hent,
Me eo kasset d'ar golach, ha Metik da gouent :
Ann disparti oa kalet c'hue o hag ankeniuz.
Ann eureustet er bed-man n'eo ket paduz !...

Dre ma chomiz er golach skeuden dous Metik kez
Eun deiz, eun noz diaizon he deue aliez,
Neuze peden Doue ha Sent koz Breiz-lzel.
Vit ma digeren e buez, laouen euvreuz, sañtel.

Pa de achu va studi ez iz da Remengol
Da bedi c'hoas evit-hi Gwerchez vad *Remed-oll*.
Seiz tro a riz d'an aoter, devez ar pardoun bras,
Ha seiz tro d'an iliz zakr war ben ma daoulin noaz
Goude an offeren-bred, o pebeuz levenez !
Er vered, gant he man guer, e velis Mitik kez
Laouen oc evel an deiz, a coant evel al loar,
Biscoz penn-heréz ken koant n'euz bet war an douar
Lugerni a re he zall he dion chod gwen a ru,
He gueneu, vel eur rozen, he bleo he lagad du

Eur groas aour en he c'herc'hen, ec'hoef danteleze
Lavaret vije eun eal eus an ev diskennet.

« O pebeuz joa evidomp kloarec Gwenole
« En em gaout en Remengol, deis pardon Mam Dou'e
« Mam an oll dud ankeniet, Gwenole ma mignon,
« Evidomp e pep amzer he fediz he galon »

« — Metik koant, setu aman eur voalen aour
« A roaz d'in arog mervel, Annaik va mamm baour,
« Doug anezi war da viz, kemer-hi digant en,
« Me dou war goalen ma mamm d'ez karet da vike »

« — Ar groas aour zo em c'herchen a vo dit Gwenole.
« Eur guchen euz va bleo e roan dit ive ;
« War ar groas se e touan a dirag a Werc'hez
« Evit karet gant Metik, 'trema vo en buez. »

Ha daoulinet en iliz, hom euz gred eur beden,
A roet evit offrans eur c'houris koar melen,
Beniguet ho medalen, poket da relegou
Da relegou Sent-Breiz, karet gant hon tadou

Goude hom euz baleet hom daou da Breiz-Izel.
Ha gulet kalz ilizou : kalz a dourio huel,
Abatti Landevenneck, ha mor Douarnenez,
Lec'h ma voa ker Is hag ar brinces Athez.

Gwelet hom eus Mene-Hom, hag iliz veur Quemper,
Mene-Bre, iliz Bulat, hag hini Landreguer,
Kastel Brest ; Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaün-ar-Foll,
Ha kaera tour zo er bed tour huel Kastel-Pol,

Gwelet hom euz Ker-Ahez, Kemperle, Pont-Nabat,
Fouenan bro ar merc'het koant, Gwengamp ha Huel,
Montroulez ha Lan-Huon, Krosen ha Les-n'Even,
Kallak bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden [goad

Klevet hom euz krozal ar mor beg a Raz,
Biskoas den n'a en tremenaz eb santout aou pe c'hlas,
Bet omp en ene Sinun, en Roueseaz, Molenez,
En enez Vaz, er Yeodet, ive er Seiz-Enez.

Eur blavez omp bet eurus evel eal Doue,
A setu lec'h pa hor gullet, an oll a lavare
• Setu kloarec a Rannou, soul evel eur serven.
• Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rozen.

III

Devez pardon Sant-Herbot, e klêvis eur c'helou,
En euz beuzet va c'halon en eur mor a zaëlou,
Gant e zad ha gant e mamm, d'am mestrezik Metik.
E oa choaset da bried eur Pagan pinvidik,
Ar Pagan ze oa diot hep furnez, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet gwin-ardant ;
Metik paour, pa e gwelet, a grene gant enkreiz ;
Hoguen, he zud oa dallet allaz ! gant an danvez !

Mont a riz prim de gwelet neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen, em creis e c'hrene ma c'halon ;
War dachen ar bourg e son e oa ar binioù,
Tud an eured a Metik beuzet en de daëlou.

Metik, a dreuz e daëlou a reaz ouzin eur zel,
En eur lavaret *kouraj, mignon fidel* !
Monet a ra en ilis, lavaret ra d'ar belek
Gwenole eo a garan hug hen vo va fried.

Koueza raze d'an douar ractal a pen-heréz
Ha douget eo dioc'h-tu euz an iliz er mez
Dispak e c'hoef, he dillat, a dispak e bleo ;
Seblantout a ra beza eur elik paour maro,

Mantret oll gant ar glac'har e kouezis d'an daoulin,
En eur grial ; • O Metik zell a druez ouzin
Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod, d'he c'her-
O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garan ! [c'hen :

An disesper en dro d'in, evel eur vantel blom.
A chassas pell ac'hanon, pell war zu Mene-Hom
Va skiant a zo kollet va c'halon a zo ien
O Metik ! Metik ! Metik pehini a garien !

Eiz-de goude asezet e kreiz koat ar Rannou,
War va diou chod a red diou feuntén a zaëlou.

Pa glevis e Remengol o zon anter-nos
E lavariz esklamet : « Va doue deoc'h bennoz.

- O Gwerc'hez vad Remengol, sellit ouz va glac'har
- Aman oun deud da vervel brema war ho touar :
- Varc'hoaz, pa zavo an heol arc'hantet en envo
- Dindan an derven goz me a vo cavet maro !!!...
- O Metik, va douzik koant, p'hini a garien.
- Kenavo larad dit er bed-man da viken.
- Gant ar maro unanet, ni c'hoas en em garo,
- Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo !!!...

IV

Ann de varlec'h da zao heol, eun durzunel bep par,
A hirvoude en derven he c'hlemou a glac'har :
Ar c'hloarek a oa maro gant an ankren,
Enn eur lavaret *Metik ! te p'hini a garien !*

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas war he vuzellou
Kroas aour ha bleo du Metik, glebet gant he zaélou,
War ann dervenn doa skrivet hano he garante,
Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'hleve...

Kasset oa bet ar c'hloarek da vered Remengol,
Pa sebeliet e dishoet iliz zakr *Remed-oll*
Iliz patronnez e vamm en deuz bet ken karet !
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en he wele douar !!!...
Eur mis goude oe klevet hanadou glac'har...
Eur plac'hik gwisket en du en bered Remengol,
Deui di da bedi Doue ha Gwerc'hes Remed-oll.

O tremen dre ar vered, velas war eur men-be
Skrifet neve flamm hanou he mignon Gwenole,
Epad ann noz daoulinet, Metik wele dourek,
Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek,

- O Gwenole, emezi setu te o repos,
- En douar zakr Remengol ez out deud d'am gortoz,
- Mez ken ma tarzo ann de o ma muia karet,
- Er be-man, dre zorn Doue, ni vevo unanet !!!..

Da zao-heol, eur belek kos, vont da bedi Doue,
He c'havas anter varo, gourveet war ar men-be
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolven ha pardon
Metik a varvas laouen, raktal, gant rann-kalon

En eur vogeden ezans ene gwen Metik kez,
'Vel eur goulmik a nijas d'ann en gant ann elez
Eus a varados Doue eur goabren arc'hantet,
War tour iliz Remengol, neuze zo diskennet,

War a goabren ar Werc'hez ha zent kos Breiz-Isel
Deus kurunen Gwonole, hac e vestrez santel :
Barzet ann amzer gwechal, drant, war he sollennou
Da Zoue en brezonnek, e gane gwersiou,

Sebeliet he korf Metik, kichen koat Gwenole,
Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant eguille,
Eur c'hloaret karantezus deus war bo be skrivet
Ar c'homsou truezus man, gand e zéalous mesket,

« *Aman repos en peoc'h kloared Koat ar Rannou,*
« *Den a feiz hag a galon den a gare e vro ;*
« *E ne gichen eo kousket Penn-heres Kerzanton,*
« *Metik an elik Doue maro gant rann galon !!!*

O Gwerc'hes vad Remengol, setu o taou buguel
Kousket e tal hoc'h ilis ha dindan ho askel :
Vel eur vam karantezus war gavel e mabik,
C'houi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleier, ogrou Remengol truezus c'houi sono ;
Barset ha pelerinet, daelon c'hui a skuillo,
War be Metik Gwenole, pa refet ho peden
Eur beden a garantez ha carguet a anken !

Bevit e doujanç Doue, tud Yaouanq Breiz-Izel,
Pedit Gwerc'hes Remengol evit ma viot zantel
Sonjet ive e Metik sonjet e Gwenole,
Bevit evel-the fidel en eil d'eguille.

Koat ar Rannou (Rann, Rannou, chants, séries) *bois des chands et des séries*. Koat bras e dero, a so en kichen ha d'ar zao-heol da ilis Remengol. Ann Drouizet beleie nar Vreton-

net gwechall c'hoas, diseiz a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, koat ar Rannou, eur louzaouen, hanvet *huel var* p'hini a zao war an dero.

Barz, barzet (Barbe-poete). Bep bloaz ive em em gave e koat ar Rannou, hag et *Rumengoulou* hirie hanvet Remengol, barzet an Arvor. Ar re ma oa tud a skient pere a gane gwerzjou great gant-he, war an traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meulodi Teutatès, doue faoz pe-hini a voa enoret elec'h man breman iliz Remengol. D'an hini vijet hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delein aour, war p'hini ar Barz a gane he zoniou.

Gwenklan, Marzin Taliezin, a oa Barzet in Breiz-Izel kent ma teuaz en hini ar feiz kristen — Breman a zo c'hoas e Breiz kalz Barzet, pere laka o studi hag o foan evit kenderchel en hon touez ar feiz ha iez hor bro. Er pen kentan eus ar barzet e man an aoutronez Kermaker, bars Breiz, annabad Herri, bars ann Aviel ; Troudee, barz ar Vugaligou ; Kemar, person vikel-vras a escopti Gwernet, barz Sant-Gwen-Eel : ann abad Klec'h, barz Rugolven ; Kaourantin Thomas, barz an Tourtan, Prosper Proux, e barz Kerne ; Ann Hegarad barz Plouec ; I.-P.-M. Ar Scour, barz an Itron-Varia Remengol ; F.-N. An Huel, barz Ker-ar-Born ; Ollivier Souvestre, barz Plouian, ann abad Poulaouek, kure Landevenek barz sant Gwenole, Karis, person Plougras, barz-Menebre, Guernison, barz Peravela, calz a re all, pere o deus gret eun niver bras a verzioù ha zonnioù kaer.

“ Kanit, a nesho, Breiziz, rag beo in gwersiou

“ Gret gant skient ha kalon, a gant gwel vad komzou.

“ Gret in e brezonnek mad, n'an e koz vrezonnek.

“ Evel a re zo kalse-ze brezounek-gallek,

Barzet a pelerinet, kanit a gwersiou santel,

Kanit gloar ha meuleudi da Vam tud Breiz-Izel ;

Ho man hag ho Patronez Ronanez ar bed oll

Mam an dud paour ankeniet *Gwerchez vad Remengol.*

I.-P.-M. AR SCOUR,

Bars Itron-Varia Remengol

ANN HINI A GARAN

Voar eun ton nevez

Ann hini a garan, zo koant evel ann heol,
Karantezuz evel Gwerc'hez vad Remengol,
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'ann hini a garan, roit bepret ho penoz.

Ann hini a garan, 'zo dous evel ar loar.
En nos pa sklerijen bugale en douar,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, zo vel eun alc'houeder,
D'am galon paour e kan soniou, gwersiou tener
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, 'zo vel eun durzunel,
Pa ve maro e far en em dol da vervel,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, 'zo eun elik Doue.
Eun elik douç a ra joausted va bue,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, 'zo douç e hano,
Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio,
Doue Sant Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan em c'halon a chomo,
Tre ma vin en bue, ha goude va maro,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, gane-me en disbeol,
Ar reposo eun deiz en bered Remengol,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan. en pales an Drindet,
Gane-me da viken a vo karet, karet,
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'an hini a garan, roit bepret ho penoz,

I.-P.-M. AR SCOUR.

Bars Itron-Varia Remengol.

Lanhuon, H. Mauger, mouler, levrer.